

Gourvil Fañch : Soniou Nevez ha Soniou Koz

dastumet ha kanet gand Fanch Gourvil (Ti Breiz – Montroulez 1930)

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

N'eus notenn vuzik ebed.

Roll ar hanaouennou

Ti-Kaniri Breiz : Berthou (Pleuviahn 1861 – Pleuvihan 1933)

Hob y deri Dando (troet deuz ar hembraeg gand F. Gourvil)

Ar boutaouer koad : dizano.

Pell a Vreiz-Izel : gand F. Koetskau (?)

Ar pillaouer : dizano.

Kousk, Breiz-Izel : An abad Marechal (?)

Ar hloareg nehet : Dizano.

Paotred Rosko : E. D'Herbais (Rosko 1864 – Pariz 1936)

Mouez ar hleier (Prosper Proux (Poullaoen 1811 – Montroulez 1873)

Hirvoudou (Paotr Treoure : Conq Augustin : Plougin 1874 – Kastell-Paol 1952)

Bonomig : dizano.

Dousig koant : E. D'Herbais (Rosko 1864 – Pariz 1936)

Son ar bloaz nevez : E. D'Herbais (Rosko 1864 – Pariz 1936)

Titre ebed.

Kan gourennerien Breiz : Erwan Berthou : (Pleuvihan 1861 – Pleuvihan 1933)

Eil titre ebed.

Matilin an Dall : J. Quééé ; Jaffré (Berne 1906 – An Alre 1886 (?)

Julig ar Ververo : dizano.

Va zi bihan : Paotr Treoure (Paotr Treoure : Conq Augustin : Plougin 1874 – Kastell-Paol 1952)

Ti-kaniri Breiz

Ni 'zo deut da gana hirie,
 'Vel en amzer goz,
Pa oa 'uz d'ar vro dorn Doue
 O rei e vennoz.
En amzer ma oa Breiz-Izel
Eur vro gaer hag eur vro zantel...
 Deuit a-leiz
'Barz Ti-Kaniri Breiz !

Ni on-deus savet an ti-mañ
 E-kreiz an dachenn,
N'eus moger 'bed en-dro dezañ
 Hag evid toenn
Nan eus nemed bolz an neñvou,
Pe ar gwez pe ar hoabrennou.
 Deuit a-leiz
'Barz Ti-Kaniri Breiz !

Ni 'fell deom e ve adsavet
 An oll bardoniou,
Ha 'vel gwechall e vo kanet
 Gwerziou ha soniou.
Hargaset ar skweriou hudur,
Kemeret ar wir blijadur.
 Deuit a-leiz
'Barz Ti-Kaniri Breiz !

Tostait 'ta braz ha bihan
 Pinvidig ha paour,
Ne ganom ket evid arhant
 Kennebeud 'vid aour...
Ni a zo on foan, on amzer,
'Vid Breiz-Izel hag he braster...
 Deuit a-leiz
'Barz Ti-Kaniri Breiz !

Amañ 'ta e klevfet meuli
 Pez a dle sevel
An eneoù mad en dudi
 'Vel war zious askell
Ar fallagriez diskuillet
A vo taolet d'an droug-spered.
 Deuit a-leiz
'Barz Ti-Kaniri Breiz !

Ar furnez hag ar wirionez
 Hargaset dre-oll.
Siwaz, en on amzer nevez,

Gand an dud diroll,
Ganeom e vo skoaziet bepred
A-eneb da vistri ar Bed.

Deuit a-leiz
'Barz Ti-Kaniri Breiz !

Evid divenn or hoz herez,
Dreist-oll feiz ha yez,
Ni 'ya en Breiz dre bep parrez,
Heb doujañs na mez,
'Vel ar beorien ni 'oar bale
Ha kousked war blouz 'vid gwele,

Deuit a-leiz
'Barz Ti-Kaniri Breiz !

Mar 'po bet eun tamm plijadur
P'arrufet er gêr,
D'ho re goz pe d'ho krouadur,
Kanit 'ta emberr
Eur werz dudiuz pe eur zon
Evid ma saillo o halon
En o hreiz,
Dre garantez evid Breiz.

Erwan Berthou

Hob y deri dando

Me am-eus eus vestrez saoez
Hob y deri dando...
Penn melen, teod hir ha lucez,
Yannig a gan atao ?
Med pa gomzen a zimezi,
Yannig, Yann,
O mamm, ne rin ket ar fazi,
Yann gamm paotr e vamm,
A glask bepred ar gwella tamm,
Yann gamm, paotr e vamm,
En-dije tapet eur pezh lamm !

Heñvel 'oa he mouez o kana
Hob y deri dando
Ouz eur goz vuoh o vleja,
Yannig a gan atao !
Pe ouz eur hoz ki oh harzal,
Yannig, Yann.
Eet e damm askorn gand eun all ;
Yann gamm, paotr e vamm
A glask bepred ar gwella tamm,
Yann gamm, paotr e vamm
En-dije tapet eur pezh lamm !

Dreist ar mor e nij va halon,
Hob y deri dando,
'Trezeg va mestrez ken mignon,
Yannig a gan atao !
'Trezeg an êl a garante,
Yannig, Yann,
A zo 'barz va zoñjou bemde.
Yann gamm, paotr e vamm.
A glask bepred ar gwella tamm
Yann gamm, paotr e vamm
En-dije tapet eur pezh lamm !

Troet diwar ar hembraeg gand Fañch Gourvil.

Ar boutaouer koad

Selaouit oll 'ta, selaouet,
Tran lar direno,
Eur zon a zo nevez savet
Tran lar dira landa,
Tran lar direno.

Eur zon a zo nevez savet,
D'eur boutaouer koad eo bet greet..

Savet eo d'eur boutaouer koad
A zo o chom e-kreiz ar hoad.

E lochenn blouz a zo bravet
Gand gwiad kevnid ha maged.

-Penaos kas dezañ e werenn,
Pa n'ouzon hent na gwenojenn ?

-Pignit aze war ar hleuz all,
Ha c'hwi 'glevo trouz e vouhal.

Trouz e vouhal hag e dalar
O vond en-dro prim ha dispar.

Ar boutouer a zo laouen,
Hag a hwitell a-bouez e benn.

-Petra 'zegasez din da zebri,
Digor ar baner ma welin.

-N'am-eus gallet degas fenez
Nemed krampouez ha bara groz.

Pinvikoh 'vefom moarvad
Pa 'mo gwerzet va boutou-koad.

Ha disul vintin e-mefom
Kig sall ha gwin, pezh a garfom.

Pell a Vreiz-Izel

I

Pell a Vreiz-Izel, va bro garet,
Pell diouz he neñv,
Va halon baour a zo glaharet,
Ha trist ivez va ene,
Kaer am-eus bale ha redeg bro,
Dre an ollved,
N'hellan kaved levenez em zro
Pell a Vreiz-Izel garet.

Diskan

N'eus forz peleh e tremenan
Me 'zo divroet,
O ! va doue, penaoz e vevan,
Pell a Vreiz-Izel garet ?

II

Bet 'on e Pariz hag en Rouañ,
He pelloh c'hoaz.
Gwelet 'm-eus ar hêriou ar haerrañ
Hag a zo bet biskoaz.
Er Frañs, er Spagn, en Bro ar Zaozon
'M-eus baleet,
Hag an hirnez a vroud va halon,
Pell a Vreiz-Izel garet.

III

En Breiz-Izel em-eus va breudeur
Ouz va gortoz,
Va mamm ha va dous en dizesper
O ouela din deiz ha noz.
En Breiz emañ an douar santel,
Va zad kousket,
Ha me ivez, 'fell ket din mervel
Pell a Vreiz-Izel garet.

Heñvelekeet euz an amerikan, gand F. Koetskau.

Ar pillaouer

Va zad en-deus va dimezet
D'eur hoz flêriuz pillaouer,
En Lokevred ez eo ganet
En komanat Toull-al-laer.

Diskan

Foei, foei, foei, va zammig aotrou
Gand e stoup hag e billou !

Tri devez goude va eured
En em gav foer Landerne,
Ha va lapous, prim dihunet,
A zaill e-mêz e wele.

Drilla 'ra eun hanter pater,
Tana 'ra e gorn-butun,
Tapoud a ra e grog pouezer
Evid mond war hent Sizun.

Pa oa hanternoz sonet,
E iliz vraz ar Fouille,
Me 'oa intañvez glaharet,
Va-unan 'barz em gwele.

Kavet en-doa kamaraded
En eru vond da billaoua,
E oll arhant en-doa fouetet
Ha tamm pillou tamm n'en-doa...

Pa 'z a Yannig d'ar pardonious,
Atao e vez mezo-dall ;
Prest e oa da goll e vragou
E Lokevred an deiz all.

Mond a ra d'ar vilin baper
Gand eur zahadig pillou.
Kalz buannoh eged eul laer
Rag preset eo an deliou.

Pa zeuio ar hiz er vro-mañ
Da derri an dimeziou,
Me a yelo en eur gana
Pell diouz paotred ar pillou.

Pa zeuio karrig an Ankou
D'ober e dro er vro-mañ,
Me a gerzo war e roudou
Hag hen pedo d'her samma.

P'en-devo an Ankou bountet
En toull ar hoz pillauer,
Me 'yelo en eur gana
Da gomanant Toull-al-Laer.

Maro eo va zammig aotrou
War e stoup hag e billou !

*

Komzet 'vo d'an aotrou person
Deuz ar flêriuz pillauer
'Vid ma kano al Liberon
Hag ouspenn ar Lib-e-rer.

Dizano.

Kousk, Breiz-Izel

An heol a zo kuzet, setu achu an de',
Me 'ghev ar hloh o tintal an Ave.

Diskan

Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar,
Setu a noz o tond war an douar,
Kousk,
Breiz-Izel, bro ker mad,
Trouz ar mor braz a zav d'az luskellad.

C'hwez vad an ed en bleun, hag al lann alaouret,
War ar mêziou, gand ar gliz-noz a red.

Ar vêserien a gan o tastum o loened,
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traoñiennou didrouz, me 'ghev kan an eostig.
Telenner noz, sonit flour ha dousig.

An neb a hwez bemdez a hounid e repoz,
D'an dud vad, Doue en-deus greet an noz.

'Uz da Vreiz o skeudi, an neñv steredennet
A lavar 'zo eun Doue ouz or hared.

Breiz-Izel, douar sakr, a-greiz kalon m'ho kar,
Bro all ken kaer n'eus ket war an douar.

An abad Marechal

Ar hloareg nehet

(Pep pennad a zo troet e galleg hag e latin. N'int ket bet lakaet amañ)

Kalz amzer am-eus-me kollet
Tra la la la la ladira loléno.
Kalz amzer am-eus-me kollet,
Ha studia n'am-eus ket greet.

Abalamour d'eun dimezell
Tra la la la la ladira loléno.
A-greiz va halon a garen.

'Barz ar ru nevez e chome
Hag aliez din e lare :

Petra 'rez 'barz ar skolachou,
Ma tleom beza priejou ?

'Barz ar gêr-mañ zo soudarded,
Kemer't unan ha va lezet.

Deuz ho soudarded n'houlan ket,
Eur hloareg 'rankin da gaved.

Petra 'laro dim on tud
Pa glevfont bugale vunud.

O houl' bara digand tata¹,
Ha boik² boik boik digand mamm ?

¹ tata : tad.

² boik : lêz (an daou her-mañ hervez an droidigez e galleg.

Paotred Rosko

N'eus par e Breiz-Izel da baotred Rosko,
Brudet int 'vid o nerz re oll 'barz ar vro.
Diwallit da goueza dindan o fao.
Ro, sko, sko mibin, sko kaled, sko atao !
Ouspenn labourerien dispar int ivez,
Da houlou-deiz 'maint er-mêz o gwele...
Gwelit o bemdez en aochou tro-war-dro,
Kerkent ma vo tre, beteg ma vo lano,
O peillad bezin war ar reier garo,
Ro, sko, sko mibin, sko kaled, sko atao !

Kalz ijin o-deus ivez paotred Rosko,
Deuz Bro-Hall a-bez o-deus greet an dro.
'Vid gwerza o zrevad dre ar marhajou,
Ro, sko, sko mibin, sko kaled, sko atao !
Dre Bariz, dre Vro-Zaoz, o-deus tremenet.
Mond a raint hebdale beteg penn ar Bed...
Ar Roskoad, gand e vouez skiltr a youho :
« Patatez, onion, brikoli, articho !
Dibabit, kemerit, an neb a garo... »
Ro, sko, sko mibin, sko kaled, sko atao !

N'eus ket lorhusoh eged paotred Rosko.
Gwalenn war o biz, c'hwez vad war o bleo,
Voulouzenn ledan en-dro d'o zog kolo...
Ro, sko, sko mibin, sko kaled, sko atao !
Gand o dousig, pa 'z eont d'ar pardonioù
'Kargont he godell aq bep seurt madigou,
Anaoud a reont mad kement dañs a zo
Ar ganaouenn ivez 'blij eston dezo,
Evel-se ar merhed 'zo pitill ganto,
Ro, sko, sko mibin, sko kaled, sko atao !

E. d'Herbais

Mouez ar hleier

Bim, baon, me 'zo strobinner,
Me 'oar petra 'gan ar hleier,
Selaouit oll o mouez santel,
Ha sentit mad ouz o hentel.

Bim, baon, baon ! kloh an overn-bred,
Lared a ra : « Hastet, hastet ».
Kalz ne zegouezont en iliz,
Nemed en hanter an ofis...

Darn ne reont nemed rohal,
Ha lod all, respet deoh, strakal,
Trompilladd gand o diou froenn,
Pe riboulad o horzaillenn.

Ar baotred lemm, dindan o zao,
A lugern ouz ar merhed brao ;
Gand eur zell flemmuz, ar merhed,
A lavar dezo : « Kendalhet ».

Yann Bitoch a glask 'n e spered
Penaoz yennad e vignoned,
Lakaad en e yalh eur bern kresk,
Dre ar burzud euz ar pemp pesk.

Ar person koz 'zo boroduz,
E brezegenn 'zo moreduz,
Heb mar ar zoubenn 'vo yennet,
Hag ar patatez kaledet.

Ar haner koz, Luc Totoro,
A vlej 'vel eu hole taro...
Emberre walho e gorzenn,
Fnt a lardo c'hweg e grohenn.

Bim, baon, kloh eur vadizaint,
Ar bugelig, va feiz, 'zo koant,
Hagouz e dad eo heñvel-tre,
Fri e baeron 'n-eus koulskoude...

Gand an holen kriz, va êlig,
E vo ruziet da vuzellig...
Er vuhez, enkrez ha daelo'
E kavi c'hoaz muioh c'hwero.

Bim, baon, dimezi daou baour-kêz,
... Poniou, truillou ha dienez...
Sort da frita 'med paourentez,

E-leiz pillig ar garantez.

Ba ! chaoket e vo patatez,
Lakaet hanter dour 'barz al lêz :
Doue a vev al loened mud
Truez en-devo ouz an dud !

Bim, baon, eun eured pinvidig,
Brall d'ar hleier, c'hwez d'ar muzik,
Diou yalh pounner 'zo 'n em baret :
Ki ha kaz a zo bazyedet.

Bim, baon, brimbalom a nerz breh,
Marvet eo pao-krog ar hrug seh...
Onion, kignen, a-zruilladou,
Ken na strinko eur mor daelou.

Tad eun tiad braz, bugale
A zo galvet dirag Doue.
An oll a ouel gand gwir glahar,
Ar hi a yud war-lerh ar harr.

Bim, baon, petra ne laront ket,
En kement yez 'zo dre ar bed ?
Koulz eo din eta troha berr,
Sard on 'vel eun teuzer kleier !

Prosper Proux.

Hirvoudou

Perag oh-c'hwi ken kaer gwisket,
Traonienn ha prad leun a vleuniou ?
Perag e kanit, lapoused,
Tra ma'z on-me o skuill daelou ?
Ho kanaouennou dudiuz
Va halon baour din a ranno,
O komz euz eun amzer evruz
Ha ne deuiio biken en-dro...

Da houlou-deiz, 'vel d'abardaez,
Me gare mond war ribl ar ster,
'N eur vouskana va harantez,
'Vel an eostig, an alhweder...
Dindan ar gwez, laouen bepred,
E kutuillen bleuniou dispar :
Siwaz, setu-me dilezet,
Ha rannet oll gand ar glahar.

Troet diwar ar skoseg gand
Paotr Treoure

Ar bonomig

« Deboñjour deoh, Janedig,
Deboñjour a laran, bremañ,
Deboñjour a laran...
Peleh emañ ar Bonomig,
Pa n'emañ o tommañ, bremañ,
Peleh 'mañ ar Bonomig,
Pa n'emañ o tommañ ? »

« Emañ du-ze el liorz,
Oh evesaad an ed, me 'gred.
Oh evesaad an ed...
It d'e gaoud di, Kloaregig,
Ha n'ho refuzo ket.

Ne ray ket,
It d'e gaoud di, Kloaregig,
Ha n'ho refuzo ket. »
« Deboñjour deoh, Janedig,
Deboñjour a laran, bremañ,
Deboñjour a laran...
Koñje ho merh Janedig,
Ouzh e houlenan, bremañ ;
Koñje ho merh Janedig,
Ouzh e houlenan. »

« Evid sur va merh Janed
Ni 'zimezo ket c'hoaz, evid c'hoaz,
Ne zimezo ket c'hoaz...
Chom a ray daou pe dri bloaz
Da roull an ebat c'hoaz, evid c'hoaz,
Chom a ray daou pe dro bloaz,
Da roull an ebat c'hoaz. »

« Keuz ho-peus, Bonomig,
Beza va refuzet, hag abred,
Beza va refuzet ;
C'hwi 'zeuy d'he hinnig din-me,
Mez n'he hemerin ket, ne rin ket...
C'hwi 'zeuy d'he hinnig din-me,
Mez n'he merein ket... »

« Dalit ho sah, Kloaregig,
Lakit hañ war ho skoaz, o ! ya da,
Lakit hañ war ho skoaz !
Koulz eo deoh e gaoud bremañ,
Evel e gaoud da vloaz, o ! ya da,
Koulz eo deoh e gaoud bremañ,
Evel e gaoud da vloaz ! »

Neuze 'ya ar hloarig
Da gaved Janetoñ, oho o !
Da gaved Janetoñ...
« Eur pok deoh-c'hwi, va dousig,
Ouzoh e houlenan, bremañ,
Eur pok deoh-c'hwi, va dousig,
Ouzoh e houlenan. »

« E-leh eur pok, Kloaregig,
C'hwi 'pezo daou ha tri, o ! ya, c'hwi
C'hwi 'pezo daou ha tri,
Ha malloz d'ar gwall deodou
'Zo kaoz d'ho tisparti, o ! ya, ni,
Ha malloz d'ar gwall deodou
'Zo kaoz d'on disparti !... »

A-benn eun nebeud goude
Janed 'zo chomet klañv, o ! ya, klañv !
Mar komañs ar Bonomig
Dond d'en em chagrinañ, hañ hañ hañ !
Mar komañs ar Bonomig
Dond d'en em chagrinañ....

Ha setu ar Bonomig
O vond da foueta bro, oho ho !
O vond da foueta bro,
Evid klask ar hloaregig,
Da gemer Jenatoñ, o ! o ! o !
Evid klask ar hloaregig
Da gemer Janetoñ.

« Deboñjour deoh, Klaoregig,
Deboñjour a laran, bremañ,
Deboñjour a laran,
Abae 'z oh bet du-mañ,
Janed 'zo chomet klañv, o ! ya, klañv

Abae 'z oh bet du-mañ
Janed 'zo chomet klañv ! »
« Laret 'm-oa deoh, Bonomig,
Ho-pije va hlasket, hag abred,
Ho-pije va hlasket,
'Teujeh d'he hinnig din-me,
Mez n'he hemerin ket, ne rin ket...
'Teujeh d'he hinnig din-me,
Mez n'he hemerin ket... »
« Dalit ho sah, Bonomig,
Lakit hañ war ho skoaz, o ! ya da,
Lakit hañ war ho skoaz...
Koulz eo deoh e gaoud bremañ,

Evel e gaoud da vloaz, o ya da !
Koulz eo deoh e gaoud bremañ,
Evel e gaoud da vloa'... »

Dizano

Dousig koant

Lugerni 'ra ar stered,
Dousig koant, Dousig koant !
Al loar 'zo dispaket,
Dousig koant !
Daelou perlez 'zo skuillet
War ar bokedou kousket,
Me, siwaz, 'zo ankeniet,
Dousig koant, Dousig koant !

'N êzenn noz a dremen
Dousig koant, Dousig koant !
Sevel 'ra ar hlizenn,
Dousig koant !
Taol warnon, va harantez,
Eur zellig a drugarez :
Me da gar gand follentez,
Dousig koant, Dousig koant !

Selaou 'ta va fedenn,
Dousig koant, Dousig koant !
Ma teho va anken,
Dousig koant !
Gra ma vo gwir va huñvre,
Ha ro ar peoh d'am ene,
Me 'vo evuruz neuze,
Dousig koant, Dousig koant !

Troet diwar ar hembraeg gand E. D'Herbais.

Son ar bloaz nevez

Poent eo dit, bloaz koz milliget,

Tra la la la la la la la...

Kuitaad ar bed ganez gwasket,

Tra la la la la la la la...

Warhoaz e teuy ar bloaz nevez ;

Tra la la la la la la la...

Ne vo gantañ 'med madelez

Tra la la la la la la la...

Rei a hell deom plijaduriou,

Hag ivez kalz a drubuillou ;

Gouelnnom gantañ eurusted

Ha beza bepred unanet.

War a-dreñv an distridigez,

Deom ar joa hag al levenez,

Stagom kelenn ouz on treustou

Hag evom chistr ken na foeltro !...

E. D'HERBAIS

Titr ebed

En Landevenneg
'Zo peder maouez evid eur gweneg ,
An hini 'chom da varhata,
En-deus evid netra ;
Hag an hini a erru d'ar yaou,
A gav leiz ar hraou...

(Lavaret e vez ivez : E Lomikêl an Tremenet ; Er Vogerieg ; 'Barz an Drennegn hag all.)

Kan gourenerien Breiz

(War eun ton kembraeg).

Ni 'zo paotred taer a Vreiz-Izel
A gar o mamm-vro dreist pep tra,
N'eus na mor, n'eus na tan na brezel
Hag a ve kab d'ober deom krena !

Diskan

Paotred Breiz, gourennerien dispar,
Paotred Breiz, gourennerien dispar,
Paotred Breiz, n'eus 'vid o diskar !

Ar Vreiziz, a-viskoaz, da viken,
A zo digabestr ha divlamm ;
N'eus bremañ na pagan na kristen
Hag a ve kab da rei deom al lamm !

Gourennom ha kanom gand kalon,
Evel on tadou-koz gwechall,
Pa oa treh ar Vreiziz d'ar Zaozon,
Ha pa oa Breiz trehourez Bro-Hall !

Erwan Berthou

Eil titr ebed

C'hwez an te hag ar hafe
A zo gand merhed Landerne.

C'hwez an tin hag ar roz wenn
A zo gand merhed Lezneven.

C'hwez ar bezin hag ar brug
A zo gand merhed Terrug.

C'hwez ar bezin hag ar mor
A zo gand merhed an Arvor.

C'hwez ar baotred hag ar potañs
A zo gand merhed Rekourañs.

Matilin an Dall

Breiziz, va henvroiz karet,
Hirio, siwaz, me a zo koz.
Nag a bed gwech am-eus sonet
Da zañsal en deiz hag an noz,
Ha mar plij gand Sntez Anna
E klevoh c'hoaz war an dachenn,
Son skiltruz va bombard velen
O lakaad tud or Breiz da drida.

Diskan

Me eo Matilin an Dall
Ar bombarder laouen,
A laka 'n dud da zañsal
Diwar va barrikenn :
Eun taol sut, ha souden
Paotred skañv d'an abadenn
Eur bomm son ha raktal
Paotred o fringal ! ge.

Yaouank e kollis ar gweled.
An eostik, ma lavarar mad
A gan flourroh en e gaoued
Pa vez dallet e zaou lagad :
An dall a gêrig Kemperle,
En e lochenn war ribl an dour,
Evel an eostik a zon flour
Etre an Izol hag an Elle.

Yannig ar Japel em hichenn
A hoari gand e viniou.
Dreist-oll pa zon bord e werenn
Evid souplad e vuzellou,
Nag eñ a sko, Yann va homper,
Gand e zonerezig lirzin...
Ha d'e heul pa sko Matilin
Eo marz gweled penaoz e fringer.

Bet on e Pariz, eun devez,
O seni dirag ar Roue,
Hag eñ koulz ha tud e balez,
Gand ar blijadur a hoarze,
A hoarze krenn, a hoarze pell
Heb galloud mired da hoarzin,
O klevoud an dall Matilin
O tistaga soniou Breiz-Izel.

Malo-Korred a Gêr Ahez,
Kenat grenader a Vro-Hall,

A veritas kleved ivez
Sonerez Matilin an dall :
A-dost, a bell eo deredet,
Da weled patrom ar soudard,
Ha da gleved mouez va bombard
O kana enor ar Vretoned.

Kalz all a vije pinvidig,
Ha ganin-me ne jom netra
Nemed isign va bombardig
Da hounid va zammig bara.
Med a ze pikol forz ne ran ;
Me 'zono keit ha ma vevin
Ha deiz va maro ne gollin
Nemed va bombard ha va diskan.

J. Quéré.

Julig ar Ververo

Me 'gave din , gwech dimezet,
Julig ar Ververo,
N'am-ije greet netra ebed,
Juliver tonti, juliver tonton.
Julig ar Ververo,
Daoulgad a skuill daero'.

Padal e rankan ober toud,
Ober krampouez ha frita youd.

Ar pezh a gavan gwasoh c'hoaz,
Eo pilad lann gand va zreid noaz...

Dimezet on d'eun ever gwin
A ya d'an davarn beb mintin.

Ar gwin a ev leiz e werenn,
N'eo ket gwin ruz, med gwin melen.

D'an davarn e ya mintin mad,
D'ar gêr e teu gwall diwehad.

Neuze 'komañs al langachou,
Ar malloziou, ar bahadou.

Ne glevan ken nemed.... -« Kerz kuit !
An ti 'zo din, ar mêz 'zo dit ! »

An dud youank, pa zimezont
Ne ouzont ket petra 'reont.

C'hwi, tud yaouank, dizimez c'hoaz
'Raog dimezi, grit mad ho choaz !

Va zi bihan

A bep tu am-eus redet
Da galsk an eurusted,
D'heul va labour, da hounid va bara...
Mez d'ar gêr, pa zsitroan,
Em halon e tañvan
Al levez, ar blijadur vrasa.
Pa zeu 'n avel da hweza,
Ar mor braz da eonenna,
Pa ziroll ar gwall-amzer, er goañv,
O ! nag eo dudiuz
Chom er goudor evuruz,
Er gêr, en va zi karantezuz.

Diskan

O, me da gar, ti va zadou,
Muioh eged an oll deñzoriou.
Karget laouen
A sklêrijenn,
Ti koz, te 'zo 'vel eur baradoz.

Ro degemer d'ar bugel
Distroet d'e gavell.
Ro din nerz, deus da floura va halon...
Me 'wel aze, damguzet,
Va hadorig vourret
Ha divreh astennet war-zu ennon,
An orolaj o seni
A sko 'vel kaniri
Hag a laka va gwad oll da vervi...
O ! va zi benniget,
Da vouse'hoarzou entanet
A laka da dridal va spered.

Troet diwar ar hembraeg gand
Paotr Treoure.